




K
R
O
A

B
R
E
I
Z

KERZU 1948

8

PRIZ : 25 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

War c'hed eus ar C'hrist (Y-F. ar Falc'hun)	Pajenn	1
Ar Bleun-Brug 1949	—	2
Psalmou ar Binijenn (Ao. Guivarc'h)	—	3
Kanenn war an Alma (Maodez Glanndour)	—	3
Goueliou ar Miz (An Tad)	—	4
An Aotrou 'n Eskob Duparc (P-Y. Nedeleg)	—	5
Pajenn an Emzao Katolik (L. Bleunven)	—	6
Ar Feiz hag ar brezoneg e Kaon (Lodo)	—	7
Nouel ! (Kanaouenn) (L. Lok ha J. Marrec)	—	8
An eured-aour (Paotr Treouire)	—	9
Tenzor an Dintin goz (Ab-Sulio)	—	12
Ya, talvezout a ra ar boan (Arzel Gervorvan)	—	14
Traou da c'houzout	—	15
C'hoariou ar veilhaden.	—	16

Korn ar Merour : L. Bleunven.

Ar Pardaez (Jakez ar Gelleg).

War golo an niverenn-man : "Dirak ar mor", Saint-Suliac
(I. ha Gw.) skeudenn Gilles Boinet.

PRIZIOU :

Koumanant ordinal (eun vloaz)	350	lur
Koumanant a zikour	500	lur
Koumanant a enor	800	lur

Gwelit korn ar merour, e
trede pajenn ar golo.

Kas an arc'hant da : **M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de **Plomelin**, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anioù, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

LAKIT EVEZ BRAS

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : **Mr l'abbé Jean-François Falc'hun**, professeur au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

2. Evit kement a zell ouz Koumanantou ha profou, skriva da : **Mr l'abbé Laurent Bleunven**, recteur, Plomelin, par Quimper, (Finistère). C. C. P. 1266.53 Rennes, ha nann mui 21.802 evel araok.

REVUE MENSUELLE

AU MEUBLIER D'ART

Ep - Breiz

René CREACH'CADIC

21, Avenue de la Gare, QUIMPER

Téléphone 4-83

Son Musée d'Art Breton

Ses Intérieurs Anciens

Installations de Magasins

Aménagements de Cafés

et de Bars Américains



CAMIONNAGE
DÉMÉNAGEMENTS

L. Tanguy

GARDE MEUBLES

Quimper

LA COOPÉRATIVE FORESTIÈRE

BOIS DE CHAUFFAGE

GAZO-BOIS

ACHATS - VENTES

8, Place Saint-Michel, SAINT-BRIEUC

Siège Central : 34, Place des Lices, RENNES

Téléphone 55-75

TI ar GLOAN

9, Straed ar C'higereziou, KEMPER

Gloanañ digemmesk

eus an oll ardameziou

E ti **SOUFREREZ KERNE**

E. BEGOT

13, Straed Jean-Jaurès, KEMPER

Téléph. 9-33

E vez dresel adleuzet evit ar gwella goloù-kaoutchoug ar rodou

Gwerz a c'holoù a bep ment — Labour vat, grael hep dale

"AGA"

Véritable Cuisinière à feu continu

"UNIQUE AU MONDE"

MODELES POUR PENSIONNATS
COMMUNAUTÉS, FERMES, etc...

Concessionnaire :

LECERF, 8, Rue Kerfenteun, QUIMPER — Téléph. 8-88

ART SACRÉ
ORFÈVRE
BRONZES
STATUAIRE
CHASUBLERIE

Pierre PÊCHE
14, Boulevard de Kerguelen
QUIMPER (Finistère)
Téléphone 8-10

LUNETTERIE — ORTHOPÉDIE

Diplôme de l'Ecole Nationale d'Optique

DELBENN

Diplôme de l'Ecole Française d'Orthopédie

16, Rue Kéréon. — QUIMPER

LE BIHAN-SALUDEN VITRAUX

7, Rue Kergariou
QUIMPER

PAPIERS D'EMBALLAGE EN TOUS GENRES
SACS ET NAPPES EN PAPIER, FICELLES

Jean PAYAN Dépôt : 54, Quai de l'Odéon
QUIMPER Tél. 12-88

133 629

WAR C'HED EUS AR C'HRIST

O Krist, Furnez an Aotrou Doue, deuit da ziskouez deomp hent ar furnez!
O Krist, rener galloudus, deuit d'hon dieubi, dre nerz trec'hus ho prec'h!
O Krist, roue dreist ar roued, deuit d'hon dieubi, na zaleit ket!
O Krist, alc'houez an neñv, digorit deomp dor ar sklerijenn!
O Krist, heol lugernus, hor sklerijennit e-kreiz hon teñvalijenn!
O Krist, maen-diaze, kennerzit an den ha n'eo nemet poultrenn!
O Krist, Doue-salver ar bed, degasit deomp buan ho silvidigez!

BIBLIOTHEQUE
QUIMPER
DIOCESAINE

SETU pedenn ankeniet an Iliz en deve-
ziou a gaso ac'hanomp betek gouel
Nedeleg.

Perak pedi hag aspedi ar C'hrist da
zont evelse? Daoust ha n'eo ket deuet,
wardro 1950 vloaz a zo, d'ober al labour
merkê dezan gant bolontez e Dad? Sal-
vet en deus ar bed, dre e vuhez hag e
varo santel : petra a jom c'hoaz da ober ?

E gwirionez, pep tra a jom c'hoaz
da ober!

**

Jezuz en deus prenet d'an holl ar
gwir da veza salvet, da vev evel bugale
Doue, war an douar-mañ hag e buhez ar
bed all.

Met ar gwir-ze, n'eo ket sevenet
c'hoaz evit an holl, ha zoken n'eo ket
peurzevenet c'hoaz evit hini eus an dud
a vev war an douar, evidomp-ni hag hon
eus bet an eurvad da zegemer ar C'hrist,
ha penn kenta hor silvidigez, dre hor
badiziant hag ar vuhez kristen.

Ennomp, kristenien, ne vo diazezet
da vad labour ar C'hrist nemet da zeiz
hor maro : betek neuze, ez omp tud en
hent.

En hent etrezek ar feiz kreñv, ar sklerijenn a ray deomp gwelet hep ehan
buhez ar bed-mañ evel eur veaj war-zu Doue;

En hent etrezek ar zantelezh, ha ne gresk nemet a-nebeudou, dre boan,
dre stourm enep an droug hag evit Doue;

En hent etrezek ar garantez bepred birvidikoc'h, hag a zo merk sklaer
ar zantelezh, o rei deomp perz e karantez Doue evitañ e-unan hag evit an holl
dud, hor bredeur.

Ha war an hent-se, striz, digompez, kalet d'an treid, ne c'hellomp bale
nemet m'emañ ar C'hrist o sach a'hanomp d'e heul, dre nerz e skouer hag
e c'halloud a Zalver.

**

Mar domp heñvel ouz ar Farizianed, gourdrouzet gwechall gant Jezuz,
e kredimp marteze hon eus graet awalc'h, eo leunet hor c'harantez ha peur-
zavet hor santelezh : ha neuze ne zantimp ezomm ebet ken eus ar C'hrist.

Neuze e ray vad deomp klêvet komzou Sant Yann-Vadezour d'ar Juevien,
ha kompren dre-ze pegen paour omp c'hoaz : " Kement gwezenn ha ne zougo
ket a frouez mat, a vezo troc'het ha taolet en tan, eme Sant Yann... Diou



vantell ho peus? Roit unan d'an hini n'en deus ket! Bez' ho peus da zebri?
Roit d'an hini n'en deus ket? ”.

Sellomp ouz hor buhez : daoust ha n'hon eus ket ezomm eus ar C'hrist
evit karet betek kement-se?

* *

Hag ouspenn, sellomp en dro deomp : nag a dud c'hoaz en deñvalijenn!
Pet n'o deus ket c'hoaz klevet ano eus Doue pe ne roont ket a zegemer dezañ!
Pet hag a zo c'hoaz o buhez dindan galloud ar pec'hed! Petra a reomp evito?
Teurel a reomp evez outo zoken?

Ha koulskoude, ar gwir gounezet d'an holl gant Jezuz da veza salvet
ne vezo sevenet nemet pa vo dastumet an holl dud gantañ en e familh. Ha ni
holl eo a zo karget gantañ da veza e ebistel, da zastum an dud keiz-se. Ni eo
a dle degas dezo ar C'hrist, dre vadelez hor buhez, dre an testeni a roomp eus
hor feiz hag eus hor c'harantez.

Daoust ha digor eo hor spered d'ar gefridi-ze?

* *

Evit hor sikour da veza ho Sent hag hoc'h Ebistel war an douar-mañ,
deuit, Salver Jezuz, deuit buhan!

Y.-F. AR FALC'HUN.

Ar Bleun Brug 1949!

Renerien ar Bleun-Brug, a-vec'h echuet ganto an ero genta dre c'houel
Kastell-Paol, o deus lakaet a-nevez an alar er park.

D'ar 24 a viz here, o deus en em vodet e Lokornan-Kerne, evit diazeza
ar gouel a vezo lidet en hañv a zeu.

N'eo ket c'hoaz renket an holl draou, met a-vremañ e c'hellomp kemenn
d'an holl Vretoned e vo bodadeg vras ar Bleun-Brug e Lokornan-Kerne, d'ar 6
ha d'ar 7 a viz eost 1949.

Eno, Breiziz a valeo war roudou an Dukez Anna, a deuas di da bardona
war bez an Aotrou Sant Ronan.

Eno ive e vezo graet eñvor 110et bloaz ar Barzas Breiz. An Ao Perrot
a oa bet e zoñj sevel ar Bleun-Brug 1939 en eñvor eus kantvet bloavez al labour
brudet-se : ar brezel a deuas ha ne voe ket ano da c'hoari, er mare m'edo ar
genvroiz er glac'har. Er bloaz a zeu e vezo en em baket, mar plij gant Doue.

Diwez atoc'h, dre ma vo peururziat ar gouel, e roimp deoc'h da anaout
e zoareou.

A vremañ, dalc'hit soñj mat eus an devez merket : renkit amzer ha beajou
evit gellout beza e Lokornan d'ar 6-7 a viz eost!

An niverenn da Zont a vezo evit
gouel Nedeleg : grit brud dezi a-vreman

PSALMOU AR BINIJENN

130^{vet} Psalm : Psalm eun ene war c'hed eus Doue : ma vez alies pedet dreizañ
evit an Anaon, e c'hell ive beza pedenn ar re veo.

De profundis...

Eus goueled an islonk, va Doue, e youc'han.
Klevit 'ta va mouez, hoc'h aspedi a ran;
Digorit ho skouarn, bezit mat war evez!
Ma talc'hfec'h an eñvor eus hor fallagriez.
Piou a c'hellfe padout dirazoc'h-c'houi, Aotrou?
Met c'houi 'ankounac'ha hon holl dismegañsou,
Evit ma vimp douget da zouj ho lezennou.
Fiziañs 'm eus e Doue, hag eur fiziañs di vrall,
Rak d'e bromesaou, dalc'hmat e chom feal.
Muioc'h a vall am eus da welout va Doue,
Eget c'hoaz ar gedour da welout ar beure.
Israël, e Doue, fiziañs, hep aoun ebet!
Heñ, an holl vadelez, d'az pardon bepred.
Pep galloud 'zo gantañ da derri al liemmen
A zeu dre ar pec'hed da huala mab-den.
D'ar bobl a Israël, e torro e hualou,
He dizamma 'raio eus he holl fec'hejou.

F. GUIVARC'H.



KANENN WAR AN ALMA

O Mamm santel ha pur hor Redemptor,
O dor an nenv 'vidomp bepred digor,
O steredenn 'us da vor ar bed-man,
Ni hoc'h asped, hor selaouit breman.
Sikourit nep a zeufe da gouezan
Nep 'zo er boan, skoazellit anezan :
C'houi an hini he deus ganet dre c'hras,
Dreist an natur, an Doue ho krouas.
Gwerc'hez atao, kent ha goude genel,
Ni 'ginnig deoc'h gant an Ael Gabriel,
Ar zalud-se, ma viot truezus
En hor c'henver, pec'herien walleürs.

Kempennet diwar EURIQOU an ao. Briz
(18^{vet} Kantved.)

Maodez GLANNDOUR.

(1) Ar ganenn-man a zo graet dreistholl evit amzer an Asvent, evel an "Alma". — He c'hana a c'heller war don
« Ni ho salud, Rouanez an Aelz ».

Goueliou ar Miz

3 KERZU : AR GWENER KENTA, HA GOUEL SANT FRANSEZ-ZAVIER.

— Goulenomp digant ar Galon-Zakr rei ar peoc'h d'ar bed, lakaat e kalonou an dud eur gwir garantez an eil evit egile, ha skuilha he gwella bennoziou war labourou ar visionerien a ya dre ar bed a-bez da skigna ar Feiz kristen.

5 KERZU : EIL SUL AN AZVENT.

„Daoust ha c'hout eo an Hini a die dont, pe eun all hon eus da c'headal?“ a c'houlennenne sant Yann ouz Jezuz... Hirio emañ an holl ivez o c'headal eur zalver. Arabat fazia : ne zeuio deomp ar zilvidigez nemet digant Jezuz. Sentomp ouz e lezennou hag e kavimp ar peoc'h, an urz vat hag an euredust.

8 KERZU : MERC'HER : GOUEL AR WERC'HEZ KONSEVET HEP PE-C'HEAD.

— „Me ho salud, o leun a c'hras!“ En enor d'hor Mamm eus ar baradoz, deuet er bed-mañ hep beza bet louzet he ene gant an distera pec'hed, deomp holl da zakramanti; bezomp laouen ouz he saludi evel ma reas an Arc'hel Gabriel, hag, evit ober plijadur dezi ha d'he Mab, prometomp dezi derc'hel ivez hon ene digailhar, dreist-holl diouz ar pec'hed vil.



12 KERZU : TREDE SUL AN AZVENT HA GOUEL SANT KAOURINTIN.

— „Kempennit d'an Aotrou Doue eun hent eeun“... An hent a gas da Zoue pe a zegas Doue betek ennomp, n'hell beza nemet eun hent eeun, hent an dever..., an hini a heulias atao Sant Kaourintin!... Pehini eo an hent a heulomp-ni? An hent eeun ha striz a blij da Zoue hag a ya d'ar baradoz... pe an hent kamm-digamm ha ledan, a zarempred an diaoul hag a gas d'an ifern? An Azvent a zo graet evit distrei diwar an hent kamm-digamm, kemer an hent eeun, hag en em lakaat dre eur gofesion zantei e stad da zegemer ar Mabig Jezuz da zeiz gouel Nedeleg. Petra a c'hortozomp evit cheñch buhez?

19 KERZU : PEVARE SUL AN AZVENT.

— „Yann a brezege ar vadeziant a binijenn“... Evit kaout perz e grasou an Aotrou Doue da zeiz Nedeleg, e ranker da genta kaout eun ene glañ. Deomp eta da gofes gant keuz d'hor pec'hejou, hag ar volonteiz start da ren hiviziken eur vuhez vat, hag e c'hellimp reseo ar gomunion da zeiz Nedeleg gant al levenez a ro Jezuz d'an dud a volonteiz vat.

21 KERZU : SANT TOMAZ, ABOS-TOL.

— Tomaz! „...Laka da viz e toull va c'hoztez, ha na vez ket diskredit, met feal“... Dre c'houlou Jezuz, sant Tomaz en deus kavet a-nevez e feiz en e Vestr : hiviziken, e vuhez a-bez a vezo evit prezeg hor Zalver, betek an devez ma vezo merzeriet evit rei an testeni diwza eus e garantez... Ha ni, ha kredi a reomp e gwirionez e Jezuz : daoust hag hor buhez a zo dezañ? Ha beva a reomp eur vuhez santel, karantezus, e testeni dirak an holl eus hor feiz kristen?

24 KERZU : DERC'HENT NEDELEG.

— „Alleluia, warc'hoaz e vezo diskaret pec'hed an douar, hag warnomp e vezo Roue Zalver ar bed“... (Eus an oferenn hirio.) Pec'hed an douar a zo warnimp-ni ivez : holl omp pec'herien dirak Doue, ha marteze ez eus en hon ene kasoni evitañ, m'hon eus en em zispartiet dioutañ dre ar pec'hed marvel. Na zaleomp ket : laouen o kaout ar pardon hag ar peoc'h, deomp da gaout ar Zalver e sakramant ar binijenn : Jezuz hepken a c'hell tenna diwarnomp droug ar pec'hed, hag evelse e c'hellimp rei dezañ eun degemer dereat da zeiz e c'hinivelez.

An Tad.

An Aotrou 'n Eskob DUPARC (1857-1946)

E LABOUR ESKOB BETEK AR BREZEL 1914

„N'eo mui evit ehana ez in davedoc'h...“ Komzou an Ao. Duparc, deiz e zakridigez ne voent ket homzou goull. Staga reas an Eskob nevez gant al labour, hep damant d'e nerz ha d'e yec'hed. E-kerz e vloaveziou kenta, e veleien a gemere aon na vefe re verr e amzer : padout a reas eiz vloaz ha tregont!

Prezeger brudet e oa bet ar c'helenner hag ar person; ken helavar e chomas an eskob, ha klevet e voe e vouez, tro-ha-tro nerz ha tener, entanet hag entanus, er pardoniou niverus, e darn anezou koulz lavaret bep bloaz; e Lourd, bep bloaz ive, en iliz Sant-Kaourantinn da geñver an darvoudou bras, hañvus pe laouen, hag alies er-maez eus an eskopti, evel pa reas en Orleans meuleudi Jann d'Ark. Atao hag e pep lec'h, e veze plijadur ouz e zelaou, e rae vad e brezegennou hag e tigasent luf d'al lidou sakr.

Bep bloaz ivez en deveze d'ober tro eul lodenn eus e eskopti evit rei ar goñfirmasion ha bizita ar parrezioù, labour skuzus ma 'z eus unan. En ilizou, er presbitalioù, an eskob a gave an tu da welout e bobl a-dost, da zelaou he goulennoù, da rei dezi e aliou mat.


Warlerc'h al lezennou a oa bet graet er Frañs, dreist-holl etre 1901 ha 1905, a-enep an Urzioù leaned ha leanezed, ar skolioù kristen hag an Iliz, ar gouarnamant en doa heuliet hentchoù ar brezel e-keñver ar relijion : tlapet e oa bet ar relijiuzer er-maez eus o c'houlentchoù hag eus o bro, serret e oa bet ar skolioù dalc'het ganto; goude an disparti etre ar Stad hag an Iliz, e oa bet lammet digant ar veleien o faeamant, lakaet krabanou ar Stad war madou an Iliz (re ar c'houlentchoù, re ar parrezioù, re an eskoptioù). Enebourien an Iliz ne felle ket dezo laza, ober merzerien, evel en amzerioù teñval an Dispac'h meur (1792 ha goude), met mouga ar feiz a glaskent ober.

Penaos e raje ar pastor nevez evit diwall e zehved? Boda anezo start en Unvaniezh Katolik evit difenn gwirioù an Iliz, ober dezo santout o nerz gant kendalc'hou ha bodadegoù niverus, sevel e pep kanton. Kevredigezioù (\"associations\") katolik ar pennou-tiegezh, kreski niver ha levezon (\"influence\") ar patronachoù hag ar c'helc'hou-studi evit ar yaouankiz. An holl oberou-ze a oa e kalon an Eskob, ha ret eo ober ano eus unan all c'hoaz,

hini ar Groaz-Wenn : evit diarbenn unan eus brasa siou ar Vretoned, ar re-garantez evit an evachoù kreñv, an Eskob a ven-nigas labour frouezus an ao. Uguen, rener ar C'hloerdi Bihan, wardro ar Groaz Wenn, ha laouen e voe o welout parrezioù a-bez koulz lavaret o tec'hout diouz an alkool milliget.

An holl skolioù serret warlerc'h al lezennou a-enep ar relijiuzer a oa bet digoret en-dro, dindan an Ao. 'n Eskob Dubillard; gwelloc'h c'hoaz, re nevez a zigore bep bloaz : seiz dioustu e 1909. Ne veze ket aes atao kaout mistri ha mestrezed, met dont a raent, dreist holl gant sikour skol Landerne hag ar C'hloerdi Bras : „Morse n'o deus graet diouer deomp, eme an Ao. Duparc da viz genver 1910, tud eus an dibab, labourerien, sperejou digar, gouestlet o buhez d'ar zakrifis“.

D'ar mare-ze ivez e falvezas gant ar gouarnamant serri skolaioù Lesneven ha



Kastell-Paol, a veze anvet o c'helennerien gant ar Stad. Kerkent e voent digoret a-nevez, gant skoazell ar c'huzulioù ti-kêr, evel skolaioù lib, renet gant beleien hepken.

(Da genderc'hel).
Per-Yann NEDELEG.

PAJENN AN EMZAO KATOLIK

I. — LEZENN AR ZUL.

Ar zul a rank dont da veza devez ar bedenn, devez an ene, an devez m'en em gaver eurus er familh... Ret eo, eme an Tad santel ar Pab, renta d'an devez-se e dalvoudegez kenta.

Netra ne c'hell hor sikour muioc'h da zeveni d'ar menozioù-ze eget gwelet asamblez petra eo ar zul.

A-berz piou e tey?

Holl e ouezit ne deu ket a-berz an dud, met *a-berz Doue*.

Skrivet adalek ar penn kenta e kalon an den, lezenn ar zul a voe embannet war menez Sinai, kals kantvejou araok done-digez Hor Zalver, dre ar c'homzou-mañ : "Dalc'h soñj eus ar seizvet devez evit ober anezañ eun devez santel. Epad c'houec'h devez e ri da labourou, met ar seizvet a zo eun deiz a ziskuit, gouestlet d'an Aotrou da Zoue : ne ri labour ebet en deiz-se..."

Al lezenn-ze, evel a welit, n'eo ket eur c'huzul hepken eo, roet gant Doue d'an dud, met eur gourc'hemenn striz. Warni eo diazezet holl vuhez an ene, ha kouls lavaret e pep pajenn eus istor ar bobl a Israel, e klevomp ar Brofeted o tigas da zoñj, gant nerz, eus an deves da zantelaat ar seizvet devez.

Daoust m'eo bet kaset, goude Hor Zalver, an diskuit eus ar zadorn d'ar zul, n'eus bet kemmet netra e galloud nag e natur al lezenn.

Petra da zoñjal dirak al lezenn-ze? E tle beza mat evidomp, pegwir Doue, hag en deus he savet, eo ar Mestr, eur Mestr mat ha fur.

Pa deu eun tad a familh da rei eun urz bennak d'e vugale pe da zifenn outo tra pe dra, ar re-mañ o deus a bep seurt abegou mat evit senti outañ. Ha n'eo ket d'an tad da rei urziou, ha d'ar vugale da zenti? Ma c'houec'h emenn eun dra, ma tifenn eun all, ar pez a glask eo mad hag interest e vugale : skiant prena en deus, hag anaoudegez eus ar vuhez... En eur zenti, en eur ober diouz o zad, ar vugale o deus pep tra da c'hounit.

Daoust ha n'eo ket evelse evit lezenn ar zul? Ya pe nann, Doue hag heñ en deus gwir da welet war vuhez an den, ha da rei dezañ lezennou?

Lezenn ar zul ne daol ket war hor choug eur bec'h re bouner da zougen. Gouzout a reomp, er c'hontrol, ez eo madelezes

zoken, ha dreist-holl marteze, pa ya enep holl leziregez, hor youl da zastum arc'hant pe da glask plijadur, rak neuze eo e rent deomp ar brasa servij, o tifenn enep hon unan, gwirioù buhez hon ene.

N'eo ket deomp-ni da varn an Aotrou Doue, war zigarez ma 'z eus leun a labour d'ober, ma 'z eo kalet ar vuhez. N'eo ket deomp-ni da lavaret dezañ : "Aotrou, ne anavezit netra; ho lezennou a zo re goz, n'heller mui o heuilh"! Piou a anavez an den, ar pez a zo mat evitañ, gwelloc'h eget Doue hag en deus e grouet! Doue en deus komzet, e volentez a zo sklaer. Plega a rankomp dezañ hep marc'hata.

En eur lezel pep labour da zul, en eur gemeret en deiz-se hent an iliz-parrez, ar c'bristen a zent ouz mouez Doue. Beva a ra trede goulenn ar Beter : "Ho polon-tez bezet graet". Enor dezañ, rak bras eo!

Lezenn Doue ne dabuter ket diwar he fenn : soubla a reer dezi. Ar pez a ra d'an den kaout relijion eo dre ma kompren mat eo dleour da Zoue a bep tra hag e tle senti outañ.

Evelse e komprenas an Israelited gwechall. Pa zisklerias Moizez dezo komzou an Aotrou hag e lezennou, ar bobl a-bez a respontas en eur vouez : "Kement en deus lavaret an Aotrou, ni her graio hag a zento outo"!

II. — AR ZUL, DEVEZ LAKET A GOSTEZ.

"Ober a ri eus ar seizvet devez eun devez santel, eun devez sakr : ar zuliou santel a viri".

Eun dra zakr, eun dra zantel, petra eo nemet eun dra lakêt a gostez, distroet diouz an implij ordinal, evit beza miret ha gouestlet da zervij Doue.

Eun iliz nevez n'eo da genta nemet eur pez mañsonerez bras, kaeroc'h, gwir eo, eget an tiez a zo en dro dezi, met gelllet e vije hep pec'hed lakaat enni ar pez a garfed. Adalek an deiz ma teu an Aotrou n'Eskob d'e venniga pe d'e zakri, ar pez mañsonerez-se a zo lakêt e servij Doue, hag a deu da veza eul lec'h santel : ti an Aotrou Doue.

Kement all a c'heller lavaret eus ar zul.

C'houec'h devez ar zizun a zo deiziou ordinal : "C'houi a ray hoc'h holl labourou epad c'houec'h devez". Met ar seizvet, Doue en dalc'h evitañ, en tenn digant an den evit ma vezo e dra dezañ, da zervija d'e c'hloar. Oc'h ober evelse, e laka war ar zul eur merk sakr, e ra

anezañ eun deiz santel.

Setu penaos eo ret kompren ar zul.

Ha p'emañ an traou evelse, eo aes awale'h gwelet ive penaos e tleomp en em gomperti gant ar zul.

Sakrilañ e vefe an den a rafe gwall implij eus eun iliz pe eus eun dra bennak gouestlet da Zoue; met ive, sakrilañ ar c'bristen a lakafe ar zul e renk deiziou ordinal ar zizun.

Ouspenn, pegwir Doue en deus miret ha perc'hennet evitañ ar zul, ez eus laeronsi ouz e lemel digantañ :

"Ar zul a zo benniget, sakr eo dreist ar re all;

Nep a zeu d'e brofani ne vo ket dida-mall..."

Devez ar zul n'eo ket eun devez ordinal lakêt ennañ eun ofereñ pe eun akt a relijion bennak : dre volentez Doue e rank beza *santelaet eus an eil penn d'egile*.

An den n'eo ket libr d'ober ar pez a gar eus ar zul. An devezour, p'en em gav diouz ar mintin en eun tiegez, ne zoñj ket kas e zêvez en dro hervez e faltazi. Heulia a ra urziou e vestr. Evelse eo e tleomp reseñ e urziou digant Doue diwar benn an doare da implij ar zul.

A FEIZ HAR AR BREZONEG E KAON

Mignoned wella ar brezoneg a gwita Breiz, buhan, an eil warlerc'h egile, galvet da varadoz an neñv. El levnevez emaint... met kement-se ne vir ket ouzomp da gaout kals keuz dezo, gant an enkreiz ne zavfe ket marteze eun diskibl da genderc'hel gant an ero warlerc'h pep hini anezo.

Y.-V. Perrot, Saig Mespaol, Lec'hvien, Saout, Marechal ha pet all c'hoaz, aet da anaon.

Bertrand Loyer ive, person ar Pelem, a zo marvet d'an 23 a vezevenn. Ne vefe ket mat o lezel da vont gant o hent nevez, hep rei dezo skoazell eur bedenn; na kennebeut e yafent kuit diwar spered ar Vretoned : evit hon eurusted eo o deus poaniet da zerc'hel sounn bannielou ar feiz hag hini Breiz.

An aotrou Marechal, eur Gwenedad, a oa nebeut anavezet gant pobl Leon, Treger ha Kerne. Ar re a oa boazet da vont d'ar Bleun-Brug ha da c'houeliou Bro-Wened o doa tro d'e welet alies. Heñ eo a zavas ar ganaouenn brudet e Breiz hag e kement lec'h ma vez kanet brezoneg : "Kousk, Breiz-Izel". "Blei Lannvaus" oa an-barz an Ao. Marechal. Da gimada dioutañ, setu eur varzoniezh savet en envor ar bleiz-se, hag a oa kentoc'h eun oan.

Ni 'zo, d'ar zul, muioc'h eget biskoaz, tud eus an deiz gant an Aotrou Doue!

Evel a welit, erfin, lennerien ger, hor zul kristen a zeu da staga hor buhez ouz Doue, o rei tro deomp da anaout e wirioù warnomp, o rei tro ive da zoursial ouz mad hon eneou. Ma c'houlenner diganeomp en deiz-se, mont d'an ofereñ, kemeret perz e ofisou all an Iliz ha chom hep labourat, eo dreist pep tra evit ma c'hellimp, aesoc'h a-ze, en em gaout gant an Aotrou Doue, rei dezañ hor c'halon, lakaat dirazañ hon ezommou a gorf hag a ene.

Ar zul a rank beza eun devez a relijion pe n'eo sul ebet.

Petra da zoñjal neuze eus ar gristenien glouar-ze a gav dezo beza dizle e kenver Doue p'o deus paket eun tammig ofereñ, hag a weler goudezo o toullbapat epad ar rest eus an devez sul?

Ar zuliou paour-ze ne roont na gloar da Zoue, na buhez yac'h d'an ene. Doue a zo, a-vec'h, gouzavfet enno : n'eo ket servichet da genta.

Ar zul en e bez eo a dle beza gouestlet da Zoue, zoken hor pourmenadennoù, hon diduamañchoù, levnezh ha joa ar familh.

L. BLEUNVEN.

KENAVO, "BLEIZ LANNVAUS"

*Bleiz Lannvaus, eun deiz a gane :
"Kousk, va Breiz, kouskit, bugalc".
Breiz, ar vamm goz, heñ a glevas;
D'ar vugale e c'houec'h emennas :
"Diwallit mat, bugale Vreiz,
da veza pre-z
eur bleiz."*

*Diwallit, rak pep kanaouenn
Re flour he c'han ha re laouen,
Ho luskellfe betek kousket.
Kerkent hunet, kerkent debret.*

*Kentoc'h beilha,
Kentoc'h poania.
Harz ar bleiz,
Paotred keiz!*


*Warnomp koumoulou du
En em led a bep tu..."*

*Aet Bleiz Lannvaus gant an Ankou.
Chomet warnomp ar c'houmoulou.
Teuzi a raint. Eun deiz, an heol
A baro c'hoaz evidomp-holl;
Ha klevet e vezo, epad meur a gantved,
Ar vugale vihan, o tastum o loened,
O kana en da yez, hor yez-ni, Bretoned,
Gwerzou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.*

*Kousk 'ta sioul, kousk, Bleiz Lannvo :
Er baradoz, kenavo!*

LODU,

NOUËL!...



Nouel! Ka-nomp Nou-el da Jo-zef da Va-ri, ha
d'ar Ma-big Je-zuz Ka-nomp holl Mev-leu-di x ha
d'ar Ma-big Je-zuz Ka-nomp holl Mev-leu-di.
En eul lo-chenn zis-ter, Jezuz a zo ganet. En eur c'hraou war ar
plouz Doue'zo gourvezet Di-ra-zan daou-li-nomp e-
vel ar bas-to-red la-ouen gant an E-liz Ka-nomp hon eu-rus-ted'

*Nouel! Kanomp Nouel da Jozef ha da Vari,
Ha d'ar Mabig Jezuz kanomp holl meuleudi (bis).*

I

*En eul lochenn zister, Jezuz a zo ganet;
En eur c'hraou, war ar plouz, Doue 'zo gourvezet.
Dirazañ daoulinomp evel ar Bastored.
Laouen gant an Elex kanomp hon eurusted.*

II

*Stouomp dirak Jezuz, hor C'hrouer, hor Zalver;
Ha Jozef ha Mari kemeromp holl da skouer.
N em erbedomp outo : selaouet e vezimp,
Hervez ar garantez d'o Mab a ziskouezimp.*

III

*Eus kavel Betleem betek k'boaz ar C'halvar
Emañ an hent da heuill ganeomp war an douar.
Pa vezimp diheñchet. — pep den a zo pec'her, —
Hastomp, galvomp Jezuz : Emañ war an Aoter.*

IV

*Tud a volentez vat, Jezuz, ni 'bromet deoc'h
Beza din da c'hounit, er bed-mañ, ar gwir beoc'h,
Bale war ho roudou, ha, gant gras ho pennoz,
Gellout kana Nouel e gloar ho Paradoz.*

(1) Ar ganaouenn-mañ a lakomp e niverenn mir kerzu, evit ma vo gellet he deski abenn Nedeleg ar bloaz-mañ. — En niverenn da zont, e vo c'houz re all.



gant Paotr Treoure

DIVIZ etre Fañch koz ha Marijan, arak jo eured aour. Fañch koz, 79 bloaz, torret gant al labour, harpet war eur vaz. Marijan, 77 bloaz, sederoc'hik, a zach he gar ganti koulskoude.

FAÑCH

Deuit amañ tost 'ta, Marijan,
Deuit amañ tost, e tal an tan
da varvailhat eur pennadig :
diskuiza 'ranker eun tammig!

MARIJAN

Alo! Deomp 'ta! Hemañ 'r Fañch-mañ
'vez atao marvailhou gantañ!

FAÑCH

Neuze 'z aimp warc'hoaz d'an iliz
da gomañs hon eil yaouankiz?

MARIJAN

Hon eil yaouankiz, Fañch, siouaz!
Ni 'vezo maro 'benn warc'hoaz!

FAÑCH

Ne vezimp ket, ne vezimp ket!
Evidoun-me a yafe d'an iliz d'ar red.
Me 'yafe c'hoaz, hep rounkouna'
da Rumengol da bardona,
hep ezomm eus an auto-karr :
sellit pegen gweñv eo va gar!
(sevel a ra e droad).

MARIJAN

Asa, Fañch koz, c'hoant ober jiminaz,
evel al logod hag ar c'haz?
Evidoun-me am befe bec'h
O vont betek penn ar c'hrec'h.
Luch oun deut; hep va lunedou
E rankfen mont a-benn er c'hleuziou;
Ha kaer am eus kromma va c'hein,
e vezan strobet gant ar vein.
Daoust ha mont a c'hellin, paotr paour,
d'an iliz 'vit hon eured aour?

FAÑCH

Gant an dra-ze, bezit dinec'h :
me 'm eus nerz, sellit, em divrec'h,
hag ho touffe, ma vije ret,
met ne vo ket.
Warc'hoaz, Marijanig, c'houi 'vezo lore'h
ennoc'h,
hag a vezo kals lijeroc'h.
N'eus par d'eun eured aour evit lakaat
an tosou koz da yaouankaat.

MARIJAN

An tosou koz! Hañ! Kleo hemañ!
Ar wirionez avat a zo ganeoc'h bremañ.

An tosou koz!... Warc'hoaz a vezo 'n devez kaer!...
Met ne gav ket deoc'h eo dre laer
omp chomet keit all da goza
hon daouig war an douar-mañ?
Ne gav ket deoc'h, daoust d'hor mankou,
omp 'kounac'hét gant an Ankou?

FAÑCH

O nann, mardoust! an Ankou n'eo na luch na dall,
hag hor sammo 'vel an dud all,
ha goude ma 'z afemp
betek oajou Matuzalem.
Koulskoude me 'gav din avat
n'eo ket stank an dud eus hon oad...
An Aotrou 'n Eskob koz, ahont e Kemper,
a'oa, diouz ma konter,
war dro 'memes oajou ganeomp...
Eun tammig enor deomp, hañ Marijan!

MARIJAN

Ya, hag ez eo! Kouls ha ni, epad e vuhez,
en deus gwelet kals traou nevez, hañ Fanchig?

An dornerez, e-lec'h freilhou,
ar frikoïou grêt er zaliou,
ar veloïou, ar c'harr-nij hag an telefon,
hag eun auto gant Marivon,
hañ Fanchig?

FANCH

Ya, c'houi 'lavar!... "Letrisite" ha T. S. F.,
hag ar merc'hed o koll o c'hoef,
hañ Marijan?

MARIJAN

Ya! Bremañ 'z eus deut cheñchamant
er bevañs hag er gwiskamant.
Dizale 'vezo muioc'h c'hoaz :
Dizale 'n dud a 'z ay e noaz!

FANCH

Peoc'h! pa deui ar yenijenn, e raint unan a zieu :
en em wiska pe gaout riu.

MARIJAN

'Deus ket a zillah da lakaat!

FANCH

Alo 'ta! Neuze 'vat!

MARIJAN

Hag hor merc'hed yaouank, holl bremañ dic'hizet,
gant o zokou gwazed hag o bleoïou frizet,
penaos e kavit anezo?

FANCH

Mez o gwelet, anat eo!
An dra-ze 'bado ket!... Gwechall goz, Marijan,
Ah! c'houi 'vat a oa kran
gant ho tavañjer bleun, ho chal hir ha brodet,
hag ho koef dantelezet gwenn,
gwintet braoik war ho penn :
trec'h da vere'hed ar juloded!

MARIJAN

Ah! koant e kavec'h ac'hanon?

FANCH

Ya, ken ma tride va c'halon!...
'poa ket ezomm, Marijanig,
da vont dindan ar mekanig,
d'en em friza diwar ho koust :
Ar frizennou 'zo ker, mardoust!

MARIJAN

Bremañ 'z eus paper a verniou
er c'hodell hag en armelioù!

FANCH

Paper didalvez, Marijan,
hag a vo laket d'ober tan,
ma koll c'hoaz e dalvoudegez,
evel ma ra, siouaz, bemdez.
Gwelet a reoc'h : aze vo ranket beza piz :
an traou zo aet er maez a briz,
ha kerât a raint c'hoaz. 'Dalv ket beza ginet :
hor bro-Frañs a zo rivinet,
ha ni, Bretoned keiz, ne raimp mui a friko
'vel m'hon eus grêt betek hirio.

MARIJAN

N'eus ket ezomm friko, e Breiz nag e nep-lec'h :
daoust ha gwechall o tebri bara zec'h,
krampouez ha soubenn ar brignon,
ne jome ket yac'h hor c'halon?

FANCH

Gwir awalc'h eo! Hep traou lipous hag hep friko
ni 'n em garas evelato, hañ, Marijan?

MARIJAN

An dra-ze 'c'hellomp lavaret :
ni 'n eus gouezet en em garet.
C'houi, pa veze dindan ho fri
eur banne souñn pe zaoù pe dri,
a gleve soroc'h awechou.
Bah! N'oa ket kalet va rebechou!

FANCH

Nann da! Marijan evit he Fañch
a oa bepred ledan he mañch;
ha morse, da fin ar zizun,
ne vanke din va zamm butun.
Ha breman, goût a rit perak
hon eus digant Doue bet eur bennoz bennak?
Evit beza desket bale
d'eun toullad mat a vugale,
aet a-zehou hag a-gleiz
da labourat douarou Breiz.

MARIJAN

Hag a zo gwir avat! Re vihan ha re vras,
ar zikour o kreski bep bloaz,
mardandousten!
Pet 'zo 'nezo? Seiz, eiz dousenn?
Labour a vezo da ranna
da bep hini e galanna...
Daoust ha dont a raint holl ware'hoaz?

FANCH

En iliz ne vo ket a blas!

MARIJAN

Hag ar c'haner, aze 'vezo?

FANCH

Hep mar ebet. Ha kan a vo ken na gouezo
ar gwiad-kevnid hag ar brenn
diwar an treustou war hor penn.
Ma ne gan ket Yann vras, me ray,
en eur lavaret : "alo, bec'h dei".
Gouzout a rit mat, Marijan
Oun bet maout atao war ar c'han.
Sellit! roit din eur brizennig,
ma kanin eur ganaouennig.
(Eur brizenn).

(O krena) :

D'hor Mamm zantez Anna, ... h. a.
Ac'hanta! Dont a ra ganen 'ta?

MARIJAN

Eun tammig e rankit krena...
N'eus forz... Evel ma lavarer :
trec'h da zakrist Lambader!

FANCH

Ah ya! Ware'hoaz, pa vije yen, pa vije tomm,
me 'zistago an Te Deum;
ha pep hini a lavaro :
ar paotr koz n'eo ket c'hoaz maro!
Alo, deomp araok ma vo noz
da gutuilh eun nebeudig roz
da gas d'an iliz ha d'an ti,
da rei eun tamm c'houez vat d'hor fri.

MARIJAN

Deomp 'ta dioustu! Gortozit, Fañch,
ma tapin krog en ho mañch.

(Mont a reont, kazet ouz kazet,
en eur gana gant eur vouez krenus :
Te De-um laudamus, te Dominum confitemur.)



teñzor an dintin goz

Gant Ab-Sulio

Kenta Pennad : AN HERITOUR

Fañchig Kideller, heritour e dintin Annaig, ha mab da Golaig ha da Zoaz Belurenn, a oa anezañ eur paotr yaouank eus ar re derrüpla a oufed da gaout, dezañ seiz vloaz war 'n ugent a oad.

An Aviel a lavar : " Gwasa-a-ze d'an den e-unan " ! Hag ar pennher yaouank Fañchig, deuet da zen a dra, a zoñje dezañ kemeret eun hanterdiegezig da lakaat eun tamm levenez en e di, en e diegez a Gervrueg, hag a oa bremañ etre daouarn e dintin, aet koz ha kabac'h.

En hor bro gaer Breiz-Izel, n'eo ket, a drugare Doue, merc'hed fur ha koant a ra diouer. Tra ! Evelato pa vezer war ar bern, emañ ar c'hiz da zibab an hini a gaver diouz an doare... kement hag ober !

Arabat barn diouz an diavaez ! Nann ; rak eun aval a c'hell kaout eul liou eus ar re gaera, ha padal ez eus eur preñv ouz e grignat.

Ha kendaze, e ranker sellet mat, araok lammât, e-pelec'h e kouezor. D'am menome, eur vaouez vat, eur plac'h fur ha poellek... ha goude ma n'he dije evit argourou nemet eun iviz war he c'hein hag unan al war an drein, a dalv kant gwech gwelloc'h eget eur Vari-Flao, eul lakotenn hag a vefe ganti an arc'hant hag an aour o louedi war ar pell-gwiniz ha war ar raden. Siouaz ! Daoulagad lemm ha koantiri ne lakeont kaoter da vervi ; ha, gwsa pezh 'zo, an neb a gemer eur vaouez v Rao a gemer diou atao, o veza ma teu ar vraoentez da leuzi gant ar gozni... Met daoust da-ze, na zaoulinomp morse dirak al " Leue aour ", rak Doue a gemer truez ouz ar paour.

Ata, paket koan ? a c'houlennas Fañchig kideller en eur vont e ti Laouig al Lezenner, marichal bras ar Runrouz.

— Gantañ emañ, Fañchig, a respontas an ozac'h. Deus d'al laez 'ta, paotr, d'ober eun tamm tomma, rak rivet e tleez beza o tont eus keit al ha dindan eur seurt amzer betek emañ !

Ar c'houeriad a dostaas war e lent ouz an aoled, hag a azezas war eur skaon-goad, tost d'an tan, endra ma lavare ar wreg ac'hano :

— O ! Fañchig emañ a zo an tan gantañ en askorn bras hag ar c'hor er re vihan !

— Hag a-nevez ganez, paotr ? a c'houlennas neuze an ozac'h, en eur lakaat eur mellad loaïad yod er zoubinell.

— Deuet oun da welet ha plijout a rafe ganeoc'h dont asamblez ganen.

— Da belec'h, peur ha da ober peseurt, kanfard ? a droc'has ar vaz-valan en eur lipat e vourrou.

— Betek maner ar C'hoad, Laouig, eo emañ em zoñj mont er pardaez a zeu. Eno, c'houi her goar kerkouls ha me, ez eus peder merc'h vras, mat da zimezi. An eil hag eben anezo o feder a zo diouz va c'hendere... hag e vennan...

— Kaout an eil pe eben eus ar plac'hed yaouank-se da wreg, neketa Fañchig ? a gendalc'has ar jubennour gwidreus. Pehini anezo 'ta, kanfard, e fell dit e c'houlennfen evidout ?

— Soazig, ar verc'h kosa, eo a zo em goulou, Laouig. Da zeiz pardon Sant Anton diweza e komzis ganti diwar benn an dimezi.

— Ha petra he deus-hi respontet dit, paotr ?

— Na ya, na nann ! Mousc'hoarzin a eure ar plac'h yaouank o klevet va c'homzou ha va diskleriadenn, ha netra ken !

Ar marichal bras a beurlonkas e loaïad yod, a evas eur banne lêz-gwedenn, hag e respontas :

— Gwelet e vo, gwelet e vo ! Eus va gwella e rin da c'hounit ar vamm evit kaout ar verc'h. Ha ma ran tro wenn, da lavaret eo ma c'houtan war va zaol, ha ma teufe dit-te kaout da zac'h, n'eo ket dre va faot-me e vezo, m'hen asur dit !

— Fiziañs am eus ennoc'h, Laouig, rak c'houi eo mestr-bazvalan teodou alaouret ar vro... Gouzout a rit trei ha distrei ho krampouezenn, war gement tu 'zo, he zeurel er vann gant ar billig ruilhennok hag he zapa gant ar baelon goudeze !

Eur mousc'hoarz a ziwanas war vuzel-lou ar marichal, hag e lavaras :

— Gant ma vezo lardet mat ar billig, ar grampouezenn hag ar baelon din, ec'h en em lakan barrek da zont a-benn eus va zaol, paotr !

Fañchig a gomprenas dioustu ar pezh a venne Laouig kaout digantañ. Rak-se, kerkent e tennas eur pezh a ugent real eus godell e jiletenn vihan, da rei, e kuz, d'an hini a dlîe dont gantañ da c'houlenn eur vaouez da zimezi.

An ozac'h a beurlipas e loa, a dorchas e c'henou gant kil e zorn hag a dosteas ouz an aoled. Eno, tost d'an tan, hag a-dal d'ar c'houeriad, ec'h azezas : dispaka a reas e yalc'had vutun, e gorn-pri bragezet a zoare, hag e kendalc'has :

— Ha neuze, kanfard, lakêt az peus ez soñj dimezi, fortuna hag eureuji gant unan eus plac'hed yaouank Janig maner ar C'hoad... gant Soazig an Togonou ! Mat a rez, va faotr, rak anat eo dit gouzout ervat ne c'helli ket kas da diegez en dro hep eur vaouez a benn hag a zoare. Da dintin ne bado ket...

— Na gomzit ket din eus va zintin Annaig, Laouig ! Kompenit 'ta, emañ-hi prest da vont en he bugaleaj, ar baourkêz noun ! N'eo ket eur vuhez eo am eus-me ganti ken, eur pennad 'zo. Kuzat a ra an arc'hant ouzin, mouzat ouz he boued ha lezel an traou war an dispalu ! E berrgomzou, peadra da lakaat eun den fur da vont sot !

— Mat, neuze, va faotr kêz, m'emañ an traou en doare-ze, e rofen ali dit da zimezi... ar c'henta 'r gwella, eme ar jubennour en eur lakaat tan war e gorn, hag en eur c'hodella al lagad-ejen en doa bet digant Fañchig.

— Se a zo pennabeg mar doun deuet d'ho kaout, Laouig ! War-ze, kenavo ha noz vat da holl dud an ti-mañ.

— Kenavo, Fañchig ! eme, a unvouez, an tiad.

Hag ar c'houeriad er maez eus ti ar marichal hep goulou d'e vlenia a dreuz an noz teñval.

Ha Laouig da lavaret, eun tachad goude :

— Setu aze eur c'hanfard hag a vezo aes ober ar strobadeñ gantañ avat ! En e leve emañ, eun teureg eo d'al labour... ha paotr faro war ar marc'had !

— Diwallit, diwallit, Laouig, a respontas e wreg, gant aon da dapa eur

C'HOARZIOMP

Ar chaseour o tont dar gêr.

E Wreg : Lazet az peus eun dra bennak ?
Ar chaseour : Ya !

Ar Wreg : E pelec'h emañ neuze ? Er gegin ?

Ar chaseour : Nann. En ospital moarvat !

zouezenn ! Arabat gwerza kroc'hen ar bleiz araok e laza. Hennez, ar ribouler-ze en deus ar brud da veza piz, ker piz hag e vamm-goz, Doue r'he fardono !

— Barba-an Turgner, Annaig ?

— Barba an Turgner, end-eeun, Laouig ! Kompenit 'ta, ar goziadez amzellus se, piz-louz ha berrzellus, a rakle an amann diwar tammou bara he bugale vihan ; pa ne veze ket he merc'hed-kaer o sellet, a lonke patatez dizec'h en o c'hroc'hen hag a frite an tammou tonenn kig-moc'h en eun douez gant ar fars bruzun chomet a-zilerc'h koan... abalamour dezi da greski ar guziadenn aour he doa graet, den ne ouie e pelec'h.

— O mat ! Unan bennak en devezo joa outo, neketa va zad ? eme Janig, merc'h an ti, en eur lakaat al loaïou er parailher.


— Kredabl sur, merc'h ! a gendalc'has an tad ; hogen, arabat barn ar mab bihan diouz ar vamm-goz, betek gouzout peseurt c'hoari a raio, heñ ! Betek-hen, ne ziskouez ket e vefe trelatet dezañ e vizied gant diaoul an arc'hant, pell ac'hano zoken !

— Ha diouz petra ho peus divinet an dra-ze, Laouig ? a c'houlennas gant eur vouez fentus, mestrez an ti.

Ar vaz-valan a welas ervat oa bet re hir e deod, hag e respontas :

— O, diouz netra ebet, Annaig, emezañ toutek !

(Da genderc'hel.)



Maen-hir blevennek
(Poulann)

Goude Kendalc'h an Divroerez (Congrès de l'Emigration Bretonne) YA, TALVEZOUT A RA AR BOAN!

Antronoz ar C'hendalc'h evit an divroerien e Kemper, d'an 30 a viz eost diweza, Arzel Gervorvan en em gavas adarre gant e amezeg, Per ar Bihan, goude koan.

PER. — Ac'hanta! Arzel, diskuit out diouz da dro e Kemper?

ARZEL. — Ya, Per, diskuit oan gentaou, met eun deveziad mat a labour am eus graet abaoe. Ne skuizan ket kement evelato wardro va ziegez ha ma ran o veaji. Hag e-ser va labour, va spered en deus bet amzer da vont en dro... Selaou ganen, Per. Lavaret eus bet deomp, dec'h, eo an divroerez eun droug, eun droug "ret", da lavaret eo eun droug ha ne c'heller ket mont ebioù dezañ... Hag hon dever, evel just, eo klask bihanaat an droug-se.

PER. — Ya, met penaos?

ARZEL. — En eur ober eun dra bennak da genta evit ar re a dle mont kuit, sklaer eo : evit klask an dra-ze e oamp aet da Gemper... Met ivez, eun dra all a zo d'ober : d'erc'hel e Breiz ar muia ar gwella eus he bugale.

PER. — Ha perak 'ta, Arzel? Daoust ha n'omp ket gouest da vev koulz en tu all da Roazon ha ma reomp en tu-mañ? Me ne gavan netra da rebech d'ar re a ya kuit da glask o buhez e lec'h ma plij ganto. Da bep hini d'en em denna evel ma kar!

ARZEL. — Me 'm dije lavaret evelout, Per, ma ne vijen ket bet eur Breizad... Evidoun-me, ha evit kals re all, ar Vretoned a zo bet a-viskoaz eur familh vras... Hag ar familhou a zalc'h d'o enor ha d'o renk, ha d'o buhez da genta! Poan a ra dezo gwelet an Ankou o skei en o zouez. Poan a ra dezo beza dispennet, gwelet o izili o vont hini amañ, hini ahont. Poan a ra dezo muioch c'hoaz gwelet lod eus o izili oc'h ober fae warno, pe o teurel dismegañs warno...

PER. — A zo gwir awalc'h!

ARZEL. — Mat, setu aze petra c'hoarvez en hon amzer gant familh vras ar Vretoned, eur familh hag he deus dastumet kement a c'hloar en amzer dremenet... En em lezet eo da goueza izel, gwir eo! Met ne c'heller ket koulskoude rei he dilez : eun torfed e vefe; he izili ne c'hellont ket muioch rei o dilez : eun taol trubarderez e vefe... Poania a rankont, er c'hontrol, d'en em harpa an eil egile, d'en em zastum ar muia ma c'hellont war an hevelep douar, evit beva an hevelep buhez!

PER. — N'am boa morse soñjet en traou-ze, a gavan gwir koulskoude! Met ne welan ket da belec'h az peus c'hoant mont gant da gaoz! Perak poania kement da zerc'hel ar Vretoned war zouar Vreiz,

pegwir e chomont Bretoned, eus ar familh, n'eus forz e pelec'h ez afent?


ARZEL. — Da genta, abalamour ma 'z eus ezomm eus an darn vrasa anezo er gêr... D'an eil abalamour ma 'z eus, siouaz, re anezo dic'halloud d'ober kals a vad d'ar poblou all, dre ma vezont beuzet en o zouez, — ha meur a hini o teurel dismegañs war ar familh... Bez'ez eus, gwir eo, Bretoned divroet hag a ra enor da Vreiz, met pet dre gant a zo anezo? Ha daoust ha n'o dije ket graet kals gwelloc'h eus o buhez, ma vije bet roet tro dezo da jom e Breiz?

PER. — Te 'gav dit neuze, ez eus plas da gals muioch a dud e Breiz eget ma 'z eus enni dija?

ARZEL. — Ya, da gals muioch. Ha war ar poent-se, emañ un-unan gant ar re o deus studiet ar gudenn : dre leziregezh ar Vretoned dreist-holl, pinvidigeziou Breiz n'int ket tost c'hoaz da veza hanter-lakaet da dalvezout : madou an douar, koulz ha re ar spered ha re an ene... Met evit dont a-benn eus an tamm labour-ze, ar Vretoned a rank dihua, lakaat o ijin da greski, poania d'en em glevet ha d'en em harpa evel tud eus an hevelep familh, ha kaout muioch a fsiants enno-o-unan hag e skoazell Doue.

PER. — Ya, Arzel : vad a ra klevet da gomzou... Evidoun-me a deu da skuiza gant ar c'haoziou goulo ha trenk, a glevan bemdez er porz : ar c'haoziou-ze ne gasont ket da bell; gant kasoni ha ranelerezh ne vo graet biken netra. Kredi a ran omp gouest c'hoaz, ni Bretoned, da lakaat buhez en hor familh, ma karomp en em glevet ha beva gant feiz ha karantez. Ya, talvezout a ra c'hoaz ar boan, ma karomp, beza Breizad!

Arzel GERVORVAN.



Traou da c'houzout...

AR BREZONEG ER SKOL

Lennet ho peus e niverenn Kroaz Breiz miz du, ar goulenn kaset d'an Ao. Quetille ha d'hor Gouarnamant gant ar Vretoned tra-mor hag Iwerzoniz, evit ma vo kelenner ar brezoneg hag istor Vreiz en holl skolioù hor bro.

D'an 22 a viz gwengolo e oa kaset eur goulenn all a berz strollad Unvaniezh difennourien ar brezoneg.

N'ouzomp ket pehini eus an daou c'houlenner-ze, pe eus ar re all graet en o raok, en deus pouezet war spered ar Vinistred. D'an 30 a viz gwengolo eo deuet ar respont, ha peseurt respont!

E gaout a reot el lizer-mañ, skrivet gant an Ao. Monod, rener deskadurezh an eil derez, d'an Ao. Seac'h, pennrener Strollad ar Vistri ha Kelennerien lik eus Breiz, e ano „Ar Falz“ :

Monsieur le Président.

Vous avez bien voulu appeler mon attention sur l'intérêt que présentait l'enseignement de la langue bretonne dans les établissements du second degré de Basse-Bretagne.

J'ai l'honneur de vous informer que je viens d'autoriser l'enseignement du breton, à titre facultatif, dans les lycées de Brest et de Quimper, à compter d'octobre prochain. Ces cours fonctionneront dans les mêmes conditions que les cours de provençal autorisés il y a trois ans.

Veuillez agréer... Signé : G. MONOD.

Falla-bouzar, a lavarer, eo an hini ne fell ket dezañ klevet... Rennerien an Deskadurezh a zo gwall vouzar!

Ar brezoneg kelennet e diou skol war ar milierou a skolioù a zo e Breiz! Gant an dra-ze, sur awalc'h, eo doujet ar gwir he deus pep yez da veza kelennet; sevenet ive an holl c'houlennoù graet betek-hen! Lore'h a vezo moarvat er Vretoned tra-mor, kement ha ma 'z eus ennomp-ni, o welet an degemer o deus kavet!

D'ar c'hi a vez re a harz gantañ, e taoler eun askorn evit sankha dezañ e c'henou... Nemet ar Vretoned n'int ket chas!

Holl Gannaded Vreiz er Gambr, eus kement rann politikel, o deus a-nevez savet eun danvez-lezenn diwarbenn ar gelenndurezh vrezonek er skolioù, hag a vezo kaset dirak ar Gambr, dre aked pevar eus ar Gannaded : An AA, Vourc'h, republikan distak; Henry, S. F. I. O.; Le Coent, komunist; Tremintin M. R. P. Daoust ha Kannaded Vreiz o devezo o c'hoant?

SKOL-VEUR AR VARZED

Didrouz, Skol-veur ar Varzed a zo krog adarre en he labour. Eur strollad eus izili ar Skol o deus en em vodet e Roazon, d'an 11-12 a viz gwengolo.

War c'houlennoù an holl izili, Taldir en deus asantet d'erc'hel ar garg a Zrouizmeur. 6 Drouiz nevez a voe degemeret ive, hag en o zouez omp laouen o lenn anao Yann ar Gall (Ab Sulio), unan eus kenlabourerien Kroaz Breiz, hag a bedomp da gaout amañ hor gwella gourc'hemennou evit an enor graet dezañ.

D'an 12, goude an oferenn lidet gant Dom Presse, Tad-abad manati Botgwenn, e voe displeget prezegennoù-studi gant Taldir, Berthou-Kerverziou, Ab-Sulio, Kerlann, Maury ha Poisson.

Setu adarre tro er rod ar Skol-veur, da c'hortoz ar C'hendalc'h bras a ray en Naoned da viz gwengolo 1949.

LABOUR EMZAO KELTIEK BREIZ

Meur a hini a grêd marteze n'eus netra da ober evit sikour ar brezoneg da greski : n'eus nemet e lezel d'ober e dreuz... Emzao keltiek Breiz ne zoñj ket evelse : setu amañ eul lodenn eus al lizer kaset da holl izili an Emzao. Lennerien Kroaz Breiz a c'hell ive tenna o mad anezañ. "Kenvroad ker."

A bep tu e sav ar c'hlemm : "Ne vez graet netra". Gwelloc'h e vije lavaret : "Ne reomp-ni, ne ran-me, netra". Greomp eun dra bennak eta.

Diou dachenn labour hon eus da ginnig da bep ezel :

I. Sevel eur skol vrezonek er barrez. — Diouz an enklask graet ganeomp e penn kenta ar bloaz, eo anat ez eus meur a lec'h c'hoaz hep eur skol da zeski ar brezoneg. Ha koulskoude, alies hon eus tud war al lec'h. Gouzout a reomp pegendiaes eo awechou labourat war an dachenn-ze e Breiz-Izel. Gellout a rafer koulskoude dastum eun toulladig skolidi, eur wech pe zious bep zisun, evit deski eur gentelig bennak, pe lenn brezoneg a vouez uhel, pe zoken komz hor yez.

Ma n'oc'h ket evit kemer ar penn, e c'hellit atao mont da gaout unan all da ober en ho lec'h, pe c'hoaz komz gant eur beleg pe gant eur skolaer kristen diwarbenn sevel eur seurt skol.

II. Leoriou. — Ne vez ket prenet a leoriou brezonek dre ma ne vezont ket gwelet. Stank eo c'hoaz niver an dud ha ne pouzont ket ez eus leoriou brezonek! Diskouezit dezo. Ar gwella gwerza leoriou a vez graet gant eun den a ginnig e varc'hadourez e ti an dud hag a ali anezo da brena... Goulennit eun toulladig leoriou a bep seurt digant E. K. B. : kaset e vezint deoc'h : ma werzit anezo, c'hioui 'gaso deomp an arc'hant. Ma werzit unan, e kasoc'h ar re all deomp en dro...

(Skriva da Y. TYMEN,
30, rue de la Résistance,
Quincy-sous-Senart (S.-et-O.).

C'HOARIOU AR VEILHADENN

RESPONTOU MIZ DU :

Dividennou.

1. — An teod. — 2. — D'eur gaouiad anavezet, rak ne vo ket kredet, pa gonzo.
3. — Eur c'hoari gartou.

EVIT MIZ KERZU.

Divinit, sperejou lemm :

1. — Em c'hraou, breman pell diouz ar pri,
e eus diou renkennad kezeg gwenn,
Bepred leiz, mat da zebri,
Eur fouetig ruz d'o c'hempenn,
Ha p'en em lakan, e troc'h a sevri.
Petra int ?
2. — Moan e c'har, kalet e empenn,
A-dreuz torgenn hag izelenn,
Bepred e vale war e benn. Petra eo ?
3. — Malvennig ouz malvennig,
Sellus ha kizidik,
Jakouig en e lokig. Petra eo ?

Diskoulm gerioù Kroaz al Lagad-du n° 6

	1	2	3	4	5	6	7	8	9
1	P	E	N	N	H	E	R	E	Z
2	A	L	I	A	S	O	U		
3	T	E		E	M	P	E	N	N
4	A	R	A	R	E				E
5	T		T	A	E	R		N	I
6	E	V	I	T	A	N		E	Z
7	Z	I		A	N		E	Z	

	1	2	3	4	5	6	7	8
1								
2								
3								
4								
5								
6								
7								
8								

- A-blaen.**
1. — Eun den o chom e Kemper.
 2. — Ar re vat (awe-chou hep i) a gas d'ar baradoz.
 3. — Dreist-muzul. — Brudet-kenañ.
 4. — Ober penn-moñs.
 5. — Eur gensonenn, diou wech. — Eur spered.
 6. — Danvez rochedou. — Kemer !
 7. — Eur vogalenn, diou wech. Penn inosant.
 8. — Eur ran, hep vogalenn. — Danvez melen a briz.
- A-sev.**
1. — An hini a goroll.
 2. — Kezeg bihan.
 3. — N'eo ket te !
 4. — Lakaat er prizon.
 5. — Rei skoazell. — Lenn en Afrika.
 6. — Peziadou mezer pe lien.
 7. — Teir vogalenn. — Diou all.
 8. — Lakaat war eur roll.

KOMZOU BUGALE.

Emeur ouz taol, da zul, tad, mamm ha bugale. E kreiz an daol, eur mell pladad fars-forn a ra enor d'an devez gouel.

Pep hini en deus dija debret e damm, hag ar vamm a ginnig eun tamm all, ma vo lakaet ar c'haz er plad.

— N'am eus ket a naon ken, eme an tad, goapaus, hag o sellet tro-dro ouz e vugale, met... evit ober plijadur deoc'h, e kemerin eun tamm all.

Neuze Yannig vihan, chomet diwarlerc'h gant e damm kenta, ha leun e c'henou : — O tad, lez anezañ ganeomp, muioc'h a blijadur a ri deomp c'hoaz !

Tintin, eur Vreizadez yaouank aet da Baris da jom, a zo bet du-mañ, o tremen eur pennad eus an hañv. Eur vintinvez ma 'z ae e kêr, edo da vat oc'h en em fichi dirak ar melezour, hag o teñvalaat he malvennou gant ar c'hreion du, mennen evit se. En he c'hichen, Perig, sebezet ha digor bras e zaoulagad :

— Tintin, lavar 'ta, evit petra e skrivez war da zaoulagad evelse ?

LEORIEREZ SANT-KAOURINTIN

J. Guivarc'h *mañ*

Straed Kereon, KEMPER

Téléph. 7-03

Levriou - skol

Pep tra evit ar skolidi
hag ar burevioù

Levriou - oferenn

Levriou - kan

Levraoueg

Poupées. Broderies

Le MINOR

Pont-Sabbé

✠ Bretagne ✠

Lans da Vicheriou ar Vro

Mark ar Berr "à la Ville d'Ys" (Ker-Is)

16, Boulevard Kerguelen (e-kichen ar Post). — KEMPER

Pour Tout
ce qui
concerne
la PHOTO

POUILLOT-EHANNO

PONT-L'ABBÉ Téléph. 1-21

ON SE DÉPLACE SUR DEMANDE

POMMES de TERRE - GRAINS - ENGRAIS - FOURRAGES

Alain PÉRON

57, Rue Ernest-Renan, PONT-L'ABBÉ (Finistère) — Téléphone. 24



LIBRAIRIE LE DAULT

16 bis, Rue René-Madec - QUIMPER

LIVRES - GRAVURES - ANCIENS & MODERNES
Tout sur la Bretagne

Achat de Livres (et de vieilles reliures)
se rend sur place à ses frais

Imprimerie Centrale de Bretagne



EDITIONS
REVUES
PÉRIODIQUES

PROGRAMMES
TOUS TRAVAUX
COMMERCIAUX

36, Rue Richard-Lenoir
RENNES

Kornig ar Merour

Lennerien gêr.

E miz mae eo ho peus resevet niverenn genta Kroaz Breiz : ar vadelez ho peus bet da zegas deomp ho koumanant.

Met soñj ho peus e oa merket war an niverenn-ze ec'h echufe ar goumanant e miz kerzu 1948.

Buan eo deuet 'ta ar mare da goumananti en dro. Met ar wech-mañ e vo evit ar bloavezh 1949 penn-da-benn.

Keraat, ha nann diskenn, o deus graet prizioù ar paper hag ar moula, evel an traou all.

Ret eo deomp eta goulenn diganeoc'h, evit ar bloavezh 1949 : **350 lur.**

E gwirionez, n'eo tamm keraet Kroaz Breiz evit-se, pegwir ho pezo 12 niverenn evit ar priz-se : peder muioù eget e 1948.

Gant ho sikour, e c'hellimp mont war araok ha labourat eus hor gwella evit brasa gload Doue en hor bro Vreiz.

Koumanantit 'ta p'eo deuet ar mare. Kluskit deomp lennerien nevez. Hor sikourit da zerc'hel beo ar brezoneg ha da hada komzou Doue e touez hor c'henvroiz.


Kasit an arc'hant da unan pe unan eus ho peleien, pe d'an hini en deus kemeret ho koumanant genta.

Pe c'hoaz, implijit ar " mandat-carte ", o terc'hel soñj eo kemmet va niverenn kont-red, hag eo bremañ :

M. Laurent Bleunven,
recteur de Plomelin, par Quimper (Finistère). — C. C. P. 1266-53 Rennes.

Niverenn miz genver en em gavo ganeoc'h a-benn gouel Nedeleg.

Grit ho posubl evit kas ho koumanant araok!



Kastell Naoned

KERENT!...

Kinnig

e Kalanna

d'ho pugale vras

eur Goumanant vloaz

da

GROAZ-BREIZ

Ar merour : M. l'Abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Moulerzh Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES

AR PARDAEZ



Ar pardaez a ziskenn, hag en draonienn e sav
Moged glas an tiez 'us d'ar c'heriadenmou.
Ar c'hounoul 'zo difiñv, hag an avel a dav,
Ha skeud hir ar gwez pin 'n em astenn en trestou (1).

Loened-nij a dremen gant froñvadeg eskel,
O vont buhan da glask eun toullig er vogel.
Eul labousig a gan, d'an devez o vervel,
Eur zutadenn lirzin el liorzig seder.

A nebeudou an noz a c'holo an dremmvel.
Er gwalarn eo teuzet ar ruzder ziweza.
Er stankenn e weler al lusenn o sevel,
'vel gloan tano ha gwenn, digoret da neza.

Ar c'hoajou 'zo sioulaet, hag ar gwez, 'hed ar c'hleuz,
A ra eun doenn deñval war riboull an heñchou.
An dero penngarnet (2), war o c'har kamm ha treuz,
A astenn o skourrou, vel divrec'h tasmantou (3).

Ar chatal a zistro goustadik d'o c'hreier.
Eur bugelig a gan o tastum e loened.
'man goullo an draonienn, sioul an holl veneier,
Hag en oabl e taskren lufr ar c'henta stered.

Eur sioulder dudiuz war ar maeziou a ren;
Ar vuhez en em c'hronn e gwasked ar c'hêriou.
Sklerijenn eur goulou e pep prenestr a gren;
Eul letern, dre al leur, a weler awechou.

Ha setu ma klever er stankenn, traoñ ar roz (4).
Mouez ar raned a c'harm ouz an oabl o skedi,
Tre ma kerz, dre ar geot gouzouret (5) a c'hliz-noz,
Ar sterig a vouskan e goudor ar pupli.

Jakez ar GELLEG.

(1) Trestou = douarou dilabour. — (2) Penngarnet = teo o fennou. —
(3) Tasmant = bugel-noz, spontailh-noz. — (4) Roz = torgenn, menezig. —
(5) Gouzouret = gleb a-vec'h.